

## KIS-460 – Kb. swydd

(GP – 09 08 94)

### A-ZIVOUT TONKAD La. e# ER PREDENEGOU

Da'n 08 08 94 an abredahez e teuas din ur bellgomzadenn diouzh GE ay oa o studial gant YBAN un aozadenn zereat evit ezteurel unan a lies meizad Gl. *vacation* (n'onn ket peheni anezhe, a-durall, ha ne vern). Soñjet o doa loc'hañ mard oa tu, diouzh Kb. *swydd*<sup>o</sup>, -i, -au 'office, job ; county' (GM 398) hag e felle dezhe spisaat e c'herdarzh hag e drezuyezhañ e Br. Rag-eeun e soñjis en un amprestadenn diouzh La. *se#do#* pe hv. O-vezañ furchet un tammig e kavis un dave da'r ger Kb. e J. Morris Jones, WG 78, ma roe La. *se#de#s* > Kb. *swydd*, ar pezh a hañval din bezañ reizh. Pellgomz a ris ouzh GE evit e gemenn dezhañ hag eñ a gadarnaas en en doa bet un hevelep soñj eñ e-unan. Evit a selle ouzh an treuzyezhañ ivez ez oamp a-unan : \**souez* vije, hag a-unan e voemp ni c'hoazh evit kavout un tamm souezhus betek re un hevelep disoc'h...

En ur vonet da zizourañ — respet dic'h — goude *koan* e teuas da'm spered (peogwir e soñjer ivez en hevelep plegoù) e teue dres ar ger man diouzh La. *ce#na*, eleze gant an kez La. *e#* hag e *se#de#s*. O vont da furchal donoc'h e welis e c'hallfe bezañ un tammig luzietoc'h ar gudenn eget n'hon boa hi kredet da gentañ penn. Sl. Pedersen, VKG 1,208-210 § 129, Förster, FT 240.n2, Lewis ELYG 7-8, Jackson, LHEB 330-335 § 28 ha HBP a-zivout ktBr. /o#"/ ha /oi/ [a arouez, a-getep *oi* hag *o@i*], sl. ivez George PHC 176.

Dedennus eo dreist-holl ar pezh a skriv Jackson, HPB 189 § 258, a dreuzskrivan aman da heul :

There is a group of words which their origin shows must have had *o@i* in Pr.B. and consequently have *wy* in the Welsh cognates ; but nevertheless fell together at some stage with *oi* and hence appear with *oa* in ModB. instead of the *oue* which would be expected. In V. however there is sometimes *oue* or *oui* (the representatives of *oi*) beside *oe* [isl. *genen*]. According to Pedersen «VKG. I,526» this happened particularly before *r*, as in *koar* etc., ha perhaps also before Brit. final *-a#*, as in *koan*, *goaz* 'goose', *skoaz* and

*bloaz*. But *-r* does not exert this sort of action on *e* in standard literary B. at any period, and in very few dialects, nor does it turn close [e@] into open [e] in V. As for the idea about *a#*, this would imply the change took place by the early part of the 5th century ; but at that period there was not yet any *o@i*, much less *o@e*, and the antecedent Brit *e#* was certainly incapable of vowel affection, whether to *e@:* or to anything else. Besides if Pedersen were right the corresponding Welsh forms should have *oe*, not *wy*, wich is not the case. The development is clearly a purely Breton one and comparatively late, and the reason for it is obscure [isl. genen].

Setu ar gerioù a ra anv anezhe [ma zreuzskrivadurioù] :

Bv. *\*ge#da#* > Kb. *gw<sup>^</sup>ydd*, Kn. *goth*, Br. *//goa\_z//* (sl. Gw. ‘*goe@*’) = *\*goaz* (skrivet ‘*gwaz*’ Hemon) ;

Bv. *\*ske#da#* > Kb. *ysgw<sup>^</sup>ydd*, Kn. *scoth*, Br. *skoz*, *//skoa\_z//* (Gw. ‘*skoe@*’) ;

Bv. *\*ke#ra#* > Kb. *cw<sup>^</sup>yr*, Kn. *cor*, hBr. *coir*, Br. *koar* (Gw. ‘*koe@r*’), *//koa\_r//* ;

Bv. *ke#na#* > Kb. *cw<sup>^</sup>yn*, Kn. *con*, Br. *koan* *//koa\_n//* (Gw. ‘*koe@n*’) ;

Bv. *\*le#ga#* > Kb. *llwy*, Kn. *lo*, Br. *loa* *//loa\_//* (Gw. ‘*loe@*’) ;

Bv. *\*ble#do-/-a#* > Kb. *blwydd*, Kn. *bloth*, Br. *bloaz* *//bloa\_z//* (Gw. ‘*ble@*’ = *blez*) ;

Bv. *\*me#no* > Kb. *mwyn*, Kn. *mon*, Br. *moan* *//moa\_n//* (Gw. ‘*moe@n*’).

An holl c'herioù brezhonek man a ziskouez an divsonenn ‘*geveel*’ (ha treadegel) *//oa\_//* pa vije gortoet *//we//*, hogen gerioù zo, evel m'en skriv Jackson, a ziskouez ‘*oue oui*’ : bet islinennet genen a-zioc'h gant ma kadarna ma soñj a-zivout aspadennoù al “*ledaveg*” (breizhveureg ar gornaoueg = arhengembraeg — “Breton 2” Fleuriot) e Bro-Wereg, hogen un afer all eo (sl. *Diaspad* ‘*Leç. mBr.*’) a bledin ganti ervat deiz pe noz. Evit a sell ouzh hon kudenn avat, e kav din e c'hell bezañ degemeret kelennadurezh Pedersen daoust d'ar pezh a lavar Jackson, hogen ouzh em harpañ war gelennadurezh Jackson e-unan, o stadañ ez eus bet un disparti etre kornogbredeneg (= kambrieg ha kembraeg) ha merventbredeneg (= kerneveg ha brezhoneg) : ahann e teufe, hervezon, an diforc'h etre pleusk ar c'hembraeg ha heni ar brezhoneg pa veze */-a:#/* el leñvenn ziwezhañ (evit lod, pe kenaozennoù kensonennoù ivez, sl. Kb. *crwys*, Br. *kroaz*). Ned eo ket, siwazh, ar c'herneveg evit diskoulmañ fraezh ar gudenn dre ma'z eas da <*o*> war un dro diskennidi */o<sup>h</sup>/* hag */oi/*, (sl. *cor* ‘*koar*’, *pos* ‘*pouez*’ ; daveennoù ne roan ket da PHC George, dre ma'z on bet gwan a-walc'h evit prestañ skouerenn nemeti ma zroidigezh da Jean Haudry he restaolo an doueioù oar pe da goulz ! Ur skouerenn all zo e Skol Veur vBrest avat, a drugarez da zDonatien Laurent). Pa c'houlakaer un hevelep disparti etre ar predenegva e kav din ned eo ket ken teñval [Gw. ‘*te@oe@l*’ = Kb. *tywyll* !] ar gudenn ha ma skrive Jackson.

Setu perak enta, o tont endro a'm staotadenn heglod goude koan, ne zoujis ket kinnizien da GE ober gant \***soaz** (a Bv. *se#da#* < La. *se#de#s*) evel treuzyezhadenn ziles Kb. *swydd* evit kement a garfe ober gantañ...

[(GE – 09 07 96) Korvo zo bet gounezet gant dezneuziadenn GP :

a) evit lavar an Armerzh : Br. **arsoaz** b. **-ioù**, Gl. *vacation* ; Br. **arsoaziad** g. **-ed**, Gl. *vacataire*, h.a. GEAK. p. 244.

b) evit lavar ar Gimiezh : Br. **soaz** b. **-ioù**, Gl. *fonction* KIS-360, La-09, p. 126 n. ; KIS-407, id., p. 428 ; **soazel** aa., Gl. *fonctionnel* KIS-407, id., pp. 423, 429.]